

KIS-634 – Boulc'hañ an emframmoù

(GE – 23 06 99)

Emañ an hañv o teraouiñ hag, ur boaz e teu da vezañ, omp douget er mare-mañ bloaz da ematersiñ war an ober a renomp. Un amzer voe ma edo kendeuzet hon oberoù hiniennel e-barzh ur framm, *Emsav Stadel Breizh*¹, a oa e bal sevel ur Stad vrezhon ha dreist-holl brezhonek. N'edo ket c'hoazh o foeñviñ “an doenn vor vreizhat²” met fiñv a-walc'h oa e Breizh endeo evit m' en kemerfemp da c'houzskor d'hon engouestladur. O prientiñ lakaat ur Stad en he sav avat e raemp ar fazi skeiñ war ar mailh kreñvañ — pa amplege nerzhoù strollennel na oa ket anezho hag, a-c'hinfeur d'hon gwander kevredadel, ur feulster na oamp ket dezevet da embreger a du 'rall. Hiziv, ul lod mat eus ezizili ESB o deus kendalc'het da labourat ken start, ma n'eo ket startoc'h, hag en amzer ma oant e-barzh un emsav frammet. Darempredoù zo chomet etrezo, met n'eus mui kel a framm, nag a gendeuzadur, nag a embann un erged boutin. Pep hini a gomz en e anv e unan hag a sin e oberoù. Kenglev zo dimp war un amkan a zo chomet an ere strishañ etrezomp : ober eus ar brezhoneg ur wir yezh. War an divoud e skriven c'hoazh er sizhun dremen da YBAN : “E-keñver ober, ne anavezan mat nemet an hini a renomp : stiet war un dachenn strizh, ur pik e moradoù ar c'hudennoù bed, o tisoc'h neoazh d'un nevezziñ saviadel diles war an dachenn strizh-se goude tregont pe bemont bloavezhiad labour tenn. Diorreadur ar brezhoneg ne gemm ket kalz traoù er bed, koulskoude drezañ e tiorreomp muioc'h eget ar brezhoneg ; ar pep pouezusañ e vo marteze ar spered omp degouezhet gantañ dre hon labour diorren — met n'ouzomp ket en a-raok e bouezuster.” Koun a zeu din eus klozadur un disterig pompadus ur pennad a skrive Roparz HEMON d'e 23 bloaz : “D'al labour eta [...]. Evit Breiz, ya ! Hogen ivez evit ar pezh a zo kant gwech talvoudusoc'h, kant gwech santeloc'h eget Breiz, evit

¹ Bet diaraoget gant *Strollad an deskadurezh eil derez* (SADED) savet e 1962 a venne bezañ maen kentañ ur stadelezh vrezhon, e voe *Emsav Stadel Breizh* krouet e 1967 hag emloezet e 1977. Lakaat a reas e goulou 128 niverenn eus ar gelaouenn *Emsav*, miziek betek 1976, trimiziek betek 1978.

² “La politique culturelle du Conseil Général vise à endiguer la déferlante du tout-breton”, frazenn bet distaget e Mae 1999 dirak Mikael Coïc gant un amaezhiad prezour e *Kuzul Meur Penn ar Bed*.

ar wirionez.¹” Ne ouzon ket evit petra e labouran, lezel a ran gant va labour an emell da verkañ e finvez : gerioù evel “gwirionez”, “rezid”, h.a. n'o deus ster ebet a-gentouez, ur ster dibarek a dennont, a-zianouez, eus labour an hini a ra ganto.

Mennoz an destenn-mañ zo deuet din goude ar walldro c'hoarvezet nevez 'zo gant skrivagnerion war a 'm eus klevet : an destenn o doa fiziet en *Al Liamm* a ve deuet e goulou displeberet, an daskemmadoù o vezañ bet graet war un amboaz hevelebekaet. Addigoret 'm eus niverennoù kent ar gelaouenn ha degouezhet on gant ar studienn “Eus an emsav d'an emframmm²” a 'm boa aozet en un amzer ma tegemere *Al Liamm* skridoù torrus d'ur c'hloz na oa ket bet klaviet c'hoazh.

En ur adlenn ar pennad e 'm eus bet tro da verzhout an dedroadurioù a zo bet e 'm yezh, e 'm mennozioù dreist-holl en ur ober pergont vloaz. O tedalvoud keal an emframmm, amprestet diouzh ar *Gestalttheorie*, d'ar c'hevredigezhioù broadel e skriven : “Evel n'en deus ar marc'h a welan er c'houmoul ken bezoud nemet em gweladur, he deus ivez ar vroad he bezoud e gweladur an dud a ra anezhi ; n'eus ket anezhi evel tra en natur, un enezenn, koumoul da skouer, met evel anadenn, anadurezh er gweladur. Pouezus eo merkañ n'emañ ket ar seurt anadurezh *e rediezh* ar faktorioù a bep seurt (douaroniezhel, tudoniezhel, sevenadurel, arboellerezhel) a daolennet boas da ziazeze ar vroad, koulskoude hep bezañ dizalc'h-krenn diouto, hogen er c'hontrol an anadurezh o deus tud e reont ur vroad eo a zeu da *reol war* labour ar seurt faktorioù hag o emdroidigezh. Splannañ prouenn er c'heñver-se en hon amzer eo ganedigezh Stad Israel : youl Israeliz, diazezet war an anadurezh e raent ur vroad, he deus goveliet ar faktorioù ret da vezoud ar vroad-se” (pp. 313-314). Pelloc'h : “N'emañ ket tonkad hor bro e-barzh ur stourm a vennozhioù etre tud, pe etre un Emsav hag ur Stad, met e-barzh ur stourm a levezon etre div gevredigezh oc'h en em frammañ, etre daou Emframmm. Evit bremañ e vevomp, daoust dimp moarvat, e dalc'h ar gevredigezh c'hall, lodek ez omp en emframmm gall, un anadurezh hepken he deus hor youl d'en em harpañ warni, ha pa ve evit he nac'h, ar vroad c'hall ez eo ; hon Emsav n'en deus gwirvoud ha ster nemet e sell d'ur gevredigezh n'eus ket anezhi c'hoazh, d'un emframmm a c'hortoz dont da wir, d'un anadurezh ma strivomp daviti” (p. 319).

Hon ober a ziazezen war arzaeladur un emframmm gall beziat en anv un emframmm brezhon bezus. Keal ar vroadelezh a zarbennen avat evel un talvoud a-gentouez ken nevet hag ar vuhez he unan ha pell diouzhin oa lakaat en argraf meizadurioù kevredadel eeunek va c'heneiled vroadelour : rez da 'm meiz edo e oa un

¹ “Breiz hag ar bed”, *Breiz Atao*, 1923, ademb. *Eur Breizad oc'h adkavout Breiz*, 1931, pp. 29-30.

² *Al Liamm*, niv. 82, 1960, pp. 312-319.

emframm eus pep kevredigezh, ken e kemeren da bal amparañ un emframm broadel brezhon en araez da argas an emframm gall eus Breizh. Hiziv omp damantet kentoc'h (al liester a arveran, rak n'on ket va unan gant an damant-se) da emsavlec'hiañ e-keñver an emframmoù forzh pe re e vent, ha da gentañ e-keñver an emframmanñ brezhon a zo o c'hoarvezout hag eñ pell diouzh pezh a lakaen dindan ar skritell "emframm brezhon" e 1960. Degaset eo pep hini ac'hanomp da brederiañ war e obererezh ha n'eo ket hepken e stern an emframmoù pe an emframmanñ, rak, mar kendaol hon labour d'an emframmanñ (ar yezh arnevez he deus perzh bras ouzh bras en emframmanñ brezhon hiziv), ez eo e berzh pennañ bezañ torrus d'an emframmoù beziat ha skoilhus d'an emframmanñ : d'an deiz ma paouezfemp a zigeriñ hag a zerc'hel digor boulc'hoù er c'hloz e kouezhfemp da renk *Al Liamm* hag all.

Derc'hent dec'h hon eus koaniet gant daou geneil a zo o yezh pemdez gwriziennet er brezhoneg bet komzet war ar maez e grez o yaouankiz. E pep mignoniezh e oamp ganto hag e se e c'halle pep hini eztaoliñ en e brezeg hep diskouez baleg ouzh prezeg ar re all. Padal, dre ma oa sipet va spered da argraf ar gestalt ne viren ket a ober keñveriadennoù.

Ar c'hestaltourion a brizie kreñvder ur furm hervez he destrizhusted war ar merzhout. Ar *form greñv* (WERTHEIMER a lavare ivez *gute Gestalt*, *form vat* ha *prägnante Gestalt*, *form vec'hiek*) eo an hini a ya an emouezañ dezhi a-empdarzh. Al lun R a nader evel "r pennlizh" hag ur striv a ranker ober evit diverzhout ar "p pennlizh" hag an "d pennlizh" bezant ennañ. Hevelep devoudoù a rae ar Gestalttheorie meiz warno diwar-bouez "saveleñnoù" a seurt gant ar re-mañ : ar furm zo kloz ha trevnet (emframmet) ; diwan ar furm zo e dalc'h parennoù ken gourzhdrec'hel (o tennañ da gefluniadur ergorel an traoù), ken gouzrec'hel (o tennañ da vred an den, e evezh, e luskedoù, e stuzegezh — ken gwir eo ez ampleg ar c'hemm etre furmoù kreñv ha gwan el lun R boaziadur al lizherenneg latin).

Anat eo e oa ur "form greñv" eus prezeg hon c'henbrederion : ennañ edo bezant emframm teodyezh Gouezeg-Pleiben nad eo ket un emframm yezhel hepken, met unan kevredadel klok ; ar gerioù a zistagent evel m'o distag(e) tud ar vro, an amprestoù gallek oa test eus perzhiadur tud ar vro er gevredigezh vloc'hel — un emframm kemplezh eo enta o pourchas he fennaenn d'un hevelepted lec'hel, al luniad prezegel o vont d'ober, gant luniadoù dibarek all, kravezel pergen, ur stuzegezh. Ken anat all e oa hon yezh ni ur furm wan, anezhi un emframm yezhel diechu, distabil, hep diazez kevredadel sonn, hep perzhiadur bloc'hel. Div stadadenn anat oa eno na oant avat nemet anaterioù, eleze disoc'hoù an nadiñ, devoudoù savelet er par kevadegel. Evel just, mar dispeger diouzh teog an anaterioù ha mar amplaer ar sell dre ebarzhiñ un

ampar treadegel, e naou un emframmm nevez, klokoc'h, an emframmm amzerel ma spurmanter teodyezh Gouezeg-Pleiben evel unan graet ganti he zalaroù : furm greñv dre vezañ klok ent kevredadel, met luniad kondaonet ent istorel dre ma 'z a da anaon an dud diwezhañ en nad(e).

Anv 'm eus graet eus an nadiñ. An nadiñ zo an taol emouezañ o tec'havaelañ ar werc'helezh war-eeun ; *anschauen* eo e gevatal alamanek, a 'm boa troet *eeunwelout* e 'm pennad eus 1960. Ar c'hestaltourion¹ — dav eo merkañ ne voe ket HUSSERL estren d'o luskad² — a ziskouezas e vez an nadiñ o wezhiañ dre amparañ maezienn ar merzhout e rezh emframmoù, ar re-mañ o tisoc'h eus gwered kengerc'hus div andon : an nadiñ evel galloud kefluniañ, ar bed evel purchaser un danvez da gefluniañ, danvez o c'hoarvezout a geñverioù egorel hag amzerel etre stummoù, fiñvoù, livioù, goulaouderioù, h.a. Evel ma reas war o lerc'h ar strukturelourion e lezent e-maez divoud anien an div andon. HUSSERL a drevonnas kelc'h strizh ar vredoniezh kantouzel ma chome kantet ar c'hestaltourion. Ne baouezas ket a ober eus an nadiñ un andon, muioc'h : e reas anezhañ an andon nemeti ; e bennañ degasadenn eo e tigoras an nor d'an dreadegelezh, ouzh he ebarzhiñ d'an nadiñ e unan dre zeskrivañ dezhañ un ampar amzerel : pep gwezh nadiñ zo war un dro nadiñ bremañ ha nadiñ kent, eleze nadiñ ar bed ha nadiñ an nadiñ, seurt doare [deouezet gant Br. *emouezañ ouzh*, lavaret diwar vont] o kevaraezañ an diren anadennoniel ha drezañ an emouezañ trehontel a zo maen bolz an Anadennoniezh¹.

¹ En o zouez, C. VON EHRENFELS (en e bennad “Über Gestaltqualitäten”, “Perzhioù furmel”, 1890, e savele keal ar *Zeitgestalten*, Furmoù amzerel, hep lakaat tre neoazh war Al. *Gestalt* ar ster en devoe diwezhatoc'h), M. WERTHEIMER a bledas gant merzhadur ar fiñv (1912) hag a ergedas astenn keal ar gestalt d'ar vredoniezh a-bezh en e *Productive Thinking* (An devezout kenderc'hus, 1943), W. KÖHLER

a studias an emframman en dec'havaelañ loenel (*Intelligenzprüfungen an Menschenaffen*, Meizprouadoù gant an *Antropoid*, 1917), dreist-holl K. GOLDSTEIN (*Der Aufbau des Organismus*, Luniadezh ar bevedeg, 1934), P. GUILLAUME, aozer *La Psychologie de la forme* (Bredoniezh ar furm, 1937) ha D. KATZ a embannas e 1950 *Gestalt Psychology. Its Nature and Significance* (Bredoniezh ar gestalt. He natur hag he ster) a seller o zri evel klokañ ambilherion arlakadenn an emframmm.

² En e zezleadenn doktorel, *Über den Begriff der Zahl* (Meizad an niver, 1887) ha dreist-holl e-barzh *Philosophie der Arithmetik*, 1891, e teu dindan bluenn HUSSERL an termen *Gestalt* evit ar wech kentañ gant ar ster "emframmm" ; e arverañ a ra a-gevel gant *Konfiguration* da arouezñ ar c'hevredoù merzhet evel underioù ha, da verkañ an ampoent ma tinodont e maezienn ar merzhout, e ra anv eus *figurales Moment* (lankad kanterc'hañ).

¹ Hiroc'h a gaver war gement-mañ en notenn “Al. **Retention**, **Protention** e preder Husserl”, KIS-576, La-12, pp. 78-89 (pp. 81-87 pergen) ; ivez, a-zivout an ere etre geniezh ar

Koulskoude, pa vez kel d'ober meiz war hon saviad, e rankomp kehuzañ harzegezh an diskiblezh huserlek. E kefridi an Anadennoniezh emañ deskrievañ anater an emframmm kevredadel ma vev hon c'heneiled eus an noz all hag ar furm greñv ez eo o idiom, deskrievañ ivez anater an andiazez kevredadel ma vevomp hag ar furm wan ez eo hon idiom. An Anadennoniezh avat ned eo ket evit ober meiz war ar gwell eo dimp hevelep andiazez kevredadel ha hevelep furm wan, na war an digeriñ boulc'hoù a reomp en emframmoù, rak ur brederouriezh a 'n emouezañ ez eus anezhi hag emouezañ zo dre anien amparañ emframmoù : an emouezañ ne c'houzañv ket an anemframmm (troadur anadennoniel an aforism kozh : “Euzhiñ a ra an natur ouzh ar goulo” zo : “Euzhiñ a ra an emouezañ ouzh an anemframmm”) ; loezadur an emframman a ve kement ha loezadur an emouezañ. Digeriñ boulc'hoù en emframmoù ned eo ket kement hag o loezañ, na 'vit se alf an digeriñ ne c'hell bezañ loet nemet e-maez dalc'h an emouezañ ha, da heul, e-maez divoud an Anadennoniezh. Setu pezh a 'm eus klasket lakaat a-wel gant keal an anemouez hag an angouzout². Setu pezh a lavare ivez MERLEAU-PONTY en e frazenn : “Kement tra a daolomp d'ar re all zo bet eginet er vro vras mut n'hon c'huita ket¹”. Freud en deus kredet e c'halle ar vro vras mut-se bezañ degaset d'an emouezañ dre dun pe dun² : pezh a ziveuz ar

barzhoneg (an nit) hag an dreadegelezh enlenat d'an emouezañ, sl. KIS-593, La-12, p. 211, n. 1.

² Sl. “Pennaenn an angouzout”, KIS-598, La-12, pp. 236-251 ; a-zivout keal an anemouez, sl. dreist-holl KIS-617, La-12, pp. 322-323.

¹ “*“Tout ce que nous jetons aux autres a germé dans ce grand pays muet qui ne nous quitte pas” (Le Visible et l'Invisible, p. 167). Sl. ivez KIS-593, La-12, p. 220.*

² Ar bomm-mañ gant FREUD : “Wo Es war, soll Ich werden” (troet gant LAPLANCHE-PONTALIS : “Où ça était, je (moi) dois advenir”) a droan : “Men edo ar se e tle ar me darvoud” hag a intentan evel henn : kement a zo diemouez, eleze dalc'het e-maez an emouezañ war-benn gwarediñ ar me, a zle bezañ dizalc'het ha degevanet gant ar me, eleze ne dle ket hepken dont da emouez d'ar me, met ivez dont da barzh er me. Un evezhiadenn gentañ a rin a-zivout lieskemeradezh an *Ich* freudek a verk a-wechoù un ensav eus ar benvegad bred, a-wechoù ar gouzrec'h e unan, ar vevenn o venel dispis etre ar c'hemeradurioù, a gomprenner pa ouzer ez eo finvez ar bredelfennerezh unvaniñ an ensavioù e gounid ur me peoc'haet, ec'honaet betek harzoù ar gouzrec'h. Va eil evezhiadenn a vo a-zivout an arver a ginnigan ober eus Br. *darvoud* evel verb gwezhiñ ha n'eo ket hepken evel verb stadañ ; rekizet eo hevelep daskemm gant kemeradurioù nevez ar verb *bout* er preder kempredel : n'emañ mui ar *bout* gennet en dibab manikeek *to be or not to be* hepken, met un ober eo ivez (arverioù kozh a verke an durc'hadur-se endeo, evel “bezaff a-ra da neuz en façon vn bleuzuen”, M.175, in GIBR², p. 239. [YBAN – 28 06 99. Hag ivez, a-douez reveziadennoù all : “N'en kannit ket 'barzh an dour sklaer, / Bout 'ra 'barzh gwad ar Salver. / N'en kannit ket 'barzh an dour stank, / Bout 'ra 'barzh ar seizh Sakramant”, *Ar Basion Vras*, gant J.- F. QUEMENER, Arion, 1977]) ; e se, *darvoud a ran*

bredelfennerezh en e roued zo eginoù sioc'han — dre se marteze e tisamm ar c'houzañvidi — met netra ouzhpenn. Un hent n'eus ken, untu, eus ar vro vras mut d'ar bed, hini an oberoù krouiñ, an nit. Alese n'eus treuzvarc'had gallus ebet etre an dud a gav o gwalc'h gant an emframmoù kloz, a zo evito un dlead o derc'hel anterin hag an dud a zo dezho un afer a vuhez pe a varv derc'hel boulc'hoù digor enno. An avantur en defe bet gant *Al Liamm* an aozerion a venegen a skouerafe an dic'hallusted anienel-se mar be ezhomm.

a dalvez kement ha "dont a ra din bout", *bout* oc'h aroueziñ un ober ; merkomp ez eo aet ar galleg gant un hent heñvel dre an un abeg, oc'h ober eus ar verb angourek *advenir* ("il advient que...") ur verb gourek ("je dois advenir").